

# CRIMOU SPONTUS

COMMETET GANT ROLLAND E PAROS PLOUHA

*D'an uneg a vis Du 1894*

Barnet d'ar Maro da bevar var-n'hugent a vis Genveur 1895

**GANT COUR D'ASSIS SANT-BRIEC**

**A laked en pad e vuez gant President ar Republik**

---

VAR EUN TON ANVEET.

Me o ped oll c'hristenien da celaou recita,  
Daou grim a zo cometet, er baros a Plouha,  
Gant un den yaouanc collet, sioas gant ar viçou,  
Ar peç so bet caos dean da ober e grimou.

Va speret a so troublet, o tonet da gompren,  
Va goad bars em goaziet, so dija casi ien,  
O clasc goud penaos alfe, un den qen inhumen,  
Dont da denna e vue, oh, digant eur c'hristen,

Er baros deus a Plouha, celaouit c'hristenien,  
Un den yaouanc so oaget a c'huec'h vla varn'hugent,  
Rolland e c'he e ano so bet en em laqet,  
Da glasc affer en Plouha, deus un neubeut merc'het.

Eur plac'h yaouanc oa eno, izel deus a speret,  
Ag'a zo bet m'eur a vec'h, gantan persecutet,  
Mac'harit ar C'hont anvet, e unan e veve,  
Bars en billagen Keraoul, ebars er baourente.

D'an unguent deus a vis dû, tro seiz heur deus an nos.  
Pa oa Marc'harit ar C'hont o qemer e repos,  
E n'eur gao Rolland infam, gant Satan possedet,  
Kerqent digant Mac'harit, digor n'eus goulnnet.

Mes homan en anveas, a respontas dean,  
An n'hor vo qet digoret, aman d'an heuriou man,  
Mes allaz dre all lucarn, er c'hriqnel ë bet et.  
Neuse dre ar pazenou en ti e disqennet.

An n'hor da vont bars en ti, neuse n'eus anfonçet,  
Ag en e goële varn'hi, ractal e n'eus lampet,  
Casi vel eull loën sovach ep coseal onthi,  
A n'eus esseet all lach, ractal e affronti.

Ar plac'h qes man a grie, sicour vit e bue,  
Ag a essaë dont cuit, digant ar barbar se,  
Mes caër deus bet nem difen, d'eus bet ranquet çedi,  
An den lach an den brutal, da zont de affronti.

A bebeus crim effroyabl, c'hristenien da glevet,  
Deus a beurs un den yaouanc, gant satan possedet,  
Allas n'em gontant qet c'hoas,  
Ma n'eus songet e laqat, var an heur da vervel.

Oh mignonet comprënit, ebars er muntrer se,  
E zaou zorn n'eus var e goug, stardet muia elle,  
Ep n'halle dizalani, na gallout n'em zicour,  
Deus ranqet souffr ar maro, digant an den traïtour.

Pad un antereur amzer, e goug deï n'eus stardet,  
Gant aon vije ket maro, e n'eus bet c'hoas songet.  
Dont da formi eur gorden, gant un e liçelliou,  
Evit donet de c'hrouga, breman sur e varvo.

Oh, Doue bebeus crimou, Rolland p'eus commetet,  
Goude affronti eur plac'h e p'eüs c'hoas e mouguet,  
A goude dont dont de mouga, c'hoas n'em gontantes qet,  
E renques dont de c'hrouga, te vo sur punisset.

Vel ma n'eus gret e grimou, e partias contant,  
dre lec'h ma oa antreet, an den barbar tirant,  
Ma en em rentas er ger, a joaüs e speret,  
Pa ne oa clevet gant den, na gant den ebet goëlet.

Aben daou devez goude, all lach petra n'eus gret,  
Dishouarni e voutou, rag aon vige songet,  
E vige en ar c'houpabl, ag e n'eus bet laqet,  
Tachou bian en o flaç, ne vigent qet hanet.

Pa velet qen Mac'harit, o vale er c'hontre,  
A so bet songet goëlet petra oa aneve,  
M'ho d'eus remerqet anhei, var e goële mouguet,  
Querqent an n'or sur varnhi, a zo bet digoret.

Oh bebeus crim effroyabl, c'hristenien da velet,  
Ar justiç deus a Blouha, ractal a zo qerc'het,  
Ar brall var Rolland deustu, gante so bet tollet,  
Ma so bet gret dean dont var ar plaç de goëlet.

Rolland pa e n'eur gavet, allas so bet troublet,  
A dar justiç a n'eus bet ar virione laret,  
Allas eo me so coupabl, me e c'he ar muntrer,  
Vit en em vengi onti, me m'eus gret e affer.

Oa ezom da glevet ken, ractal e arrêtet,  
Dar prison da Sant-Briec, e ze bet conduit,  
El lec'h ma nevo amzer, da songeal ne grimou,  
Da songeal ne vue fall, ag en e oëll viçou.

D'ar bevar de varn'hugent, demeus a vis genver,  
Gant c'our d'assis Sant-Briec. e jujet e affer,  
Hugent test so bet clevet, ebars er c'hour d'assis,  
Arog prononç e setañç, gant an dud a justic.

Mes ar jureet n'eur voës, o deus bet condaonet,  
Rolland en qer Sant-Briec, da vea distruget,  
Evit paëa e rançon, deus crimou qen terrubl,  
E ranco dont da vervel, dirag cals deus a dud.

D'ar c'hour a gassassion, e affer so casset,  
En lec'h m'he bet adare, d'ar maro condaonet,  
Preçidant ar Republiq, ontan gemen true,  
Ma n'eus han bet condaonet, ar rest deus e vue,

Da vont toës ar forçalet, da ober pinigen,  
Evit e grimou spontus ra crena pep c'hristen,  
Eno a nevo amzer, d'en em gonvertissa,  
Aben ma rento e gont da grouer ar bed-man.

Me o ped oll dud yaouanc, a glevo qement man,  
Bezit oll muioc'h prudant, evit n'he bet eman,  
Ag o po oll pligeadur, tre vec'h var an douar,  
A goude heur o maro, en em velfet er gloar.

¶ rec'homp va mignonet qer, ar viçou qer barbar,  
▷ zo mal'hevrusamant, a re var an douar.  
● ll a m'eump om defotou, sioas bars er bed-man.  
◐ aromp an eill eguille, ar peç dec'h a zouëtan.

FIN

*Propriété réservée de l'Auteur*

# RECIT TRIST

VAR SUJET

## AR GOUAN MISERAB

Deus ar blaves pemzek a pevar hugent

---

VAR DON : *Ar preçidant Carnot.*

Habitantet a vreit-izel, tostaït oll da glevet,  
Mar gallan en em occupi, da zigeri va speret,  
Me a laro dec'h pen da ben, ep n'em vancout mar gallan,  
Ar vizer, an dristidigues m'eump da zoufr er gouan'man.

Cals a dud a lavaro din, ni a oar oll qement se  
Pa rencomp dont d'ho anduri, couls en nos evel en de,  
Ar virione choui a lavar, n'hallan qet dislavaret,  
Mes greomp-ta réflexion, var eur gouan qer calet.

Cals a dud cos a meus clevet, o tont sur da lavaret,  
En o buez n'ho d'eus goëlet, biscoas gouan qer calet  
Evel m'eump goëlet bars er bla pemzeg a pever hugent,  
Va goad so ien em goaziet, pa deuan me da gompren.

An erc'h ne ra nemet coëa, ag ar scorn zalc'h da ober,  
Ma ne finis qet ep dale, perisfomp oll gant mizer,  
Allas cals a dud gant an nâon, a gant ar riou so marvet,  
En defot caout soulageamant, en creis ar gouan calet.

Oh, tud pinvidic me o ped, çelaouit oll qement man,  
Astid digeri o tiou vrec'h, evit dont da assista  
An dud a zo er vizer vras, sioas cals a zo breman,  
Ep ne allont gonit netra, da basseal ar gouan.



Comprenit bars er familhou, d'eus bugale da veva,  
Ag a zo bemde o crial, defot caout un tam bara,  
A danve tan evit toma, sioas c'hoas n'ho devezs qet,  
Hastit soulagi o mizer, o buez dhe astenfet.

Eur malheur bras so eruet, dre effet ar baourente,  
Eur vreg qes et en dizesper, gant pemp eus a vugale,  
O clevet, anhe o crial, deoa tam da reñ deze,  
Ma songeas dre be sort moyen, n'em dizober dionte,

En em destumet en o c'hambr, seret clos en dro deze  
Deus bet gret tan gant glaou ardant, e bugale a grie,  
Allas aben neubeut goude, ar vugale oa sioul bras,  
Rag asphixiet e oant oll, c'huec'h den eno a varvas.

Oh peger trist ze clevet, ar vizer so er bla-man,  
Ar vartolodet var ar mor, o deus ive cals a boan,  
Rag cals anhe a ve scornet, o izili, dionte,  
Oll e criont ma finisse ar gotan rust ep dale.

All labourerien n'hellont qet labourat o douarou,  
Er bla man e vo stard bras d'he, dont da baëa o fermou,  
Rag eur c'holl bras certen deus bet, var o oll draou er-blaman  
Gant an amzer rust a calet, so bet en creis ar gouan.

Ar patates evit ar bla, a zo bet meurbet dister,  
Goude ma int bevanç ar paour, couls evel all labourer,  
A gant ar gouan mizerab, sioas int bet oll scornet,  
Se a n'eus gret domaj d'ar paour, couls a d'ar baisantet.

Allas ar c'herc'h a zo ive. gant ar scorn cals domaget,  
En darn vuia d'eus ar plaçou, renco bea ad c'hadet,  
Ar c'hol so ive partiet, couls ag all legumachou,  
Ar balan, all lann so sec'het, ganemp netra ne chomo.

Ar vizer a zo er vro man, dre oll allas a zo bras,  
A c'hoas n'irt qet comparachet, d'eus ar broiou al sioas,  
Rag pa sellan ar c'heloyou, va c'halon ve contristet,  
O velet n'ag a valheuriou, sioas a zo eruet.

Cals a dud sioas bars en erc'h, o d'eus cavet o maro,  
Rag er broyou all a zo erc'h, qen huel a meneiou,  
An an ep o deus ar malheur, da zongéal antren enne,  
A zo sur ne retornfont, d'eus an erc'h se en bue.

Eur facteur gant e lizerou, allas so bet attaqet,  
Goude ma oa demeus aze, gant tud all avertisset,  
Da nompas antren bars en erc'h, rag dangerus bras e oa,  
Allas a lavar ar facteur, rëd e din en em renta.

Neuze e ze bet partiet, vit songéal en em renta,  
Mes allas en erc'h e chomet, ne all qen en em denna,  
Ma n'eus ranqet ar facteur paour chom da berissa eno,  
Oh, c'hristenien comprenit-ta, peguer trist oa e varo.

Ya cals a dud a zo chomet, bars en erc'h da berissa,  
Malhevrusamant cals anhe, a oa dre o fot brassa,  
Rag m'eur a ini en boësson, en creis an erc'h so cavet,  
Lod anhe sioas ve maro, a lod all a ve scornet.

Var ze eta va mignonet, greomp oll attantion,  
Na c'heomp qet d'en em livra, na d'en em reï d'ar boësson,  
Ispicial creis ar goan, pa ve erc'h var an douar,  
Rag an ini goëo ennan, santo na tom na clouar.

Mes pep den ebars er bed man, sioas n'eus e blaneden,  
Evrus e an ini a n'eus planeden vad da zouten,  
Rag c'hoas e m'eus da ziscleria, malheuriou so eruet,  
Ebars er vro dre an effet, d'emeus ar gouan calet.

Breman pa m'eus discleriet dec'h, darn demeus ar malheuriou  
A zo eruet dre an erc'h, gant cals a dud d'eus ar vro,  
Me a zisclerio dec'h ive, malheuriou so eruet,  
Gant ar scorn so qer mizerab, er gouan-man caledet.

Cals a vugale sioas d'he, o d'eus bet avanturet,  
Mont da risqa var ar scorn bras ag a so bet perisset,  
Rag allas o vea sonjet, mont re don var ar scornen,  
Ar scornen a deu da deri, kenavo evit biqen.

Cetu ar peç so eruet, vit an deiou tremenet,  
Erve ma raport ar c'helou, gant eur vanden grenardet,  
Pevarzeg pe hemzeg e oant, lod oa eru tud yaouanc,  
Oa et da risqa var scorn, casi vel tud disqiant.

Allas ar scornen a oa bras, ar reman c'hës don varni,  
Ep deoa sqiant da zongéal, e c'halge dont da deri,  
Pa oant en em lançet varn'hi, ar scornen deu da deri,  
Ma coëont tout ebars er stang, ep ma so chomet ini.

Oh, bebeus glac'har bretonet, evit o zud pa glevont  
O c'halonou ebars n'ho c'hreis, o sesiet gant ar spont,  
Goëlet o bugaligou gues, beuet dindan ar scornen,  
O fligeadur a zo echu, deo nemet glac'har biqen.

Goëlet ne allont o zenna, d'eus ar stanc da enteri,  
Qement-se a gresc o zourmant, o glac'har ag o annui,  
Gallout reposi n'ho goële, allas n'halfont birviquen,  
Pa zonzont vo o bugale, er stanc dindan ar scornen.

Me o ped tadou a mamou, da zont da laqat eves,  
Ne lezit qet o pugale, da vont en risq o buez,  
Da risqa var scornenou bras, evit qemer pligeadur,  
Gant aon e colfent o bue, refent dec'h displigeadur.

Arog donet da finissa, me o ped oll bretonet,  
Da zoulagi ar beorien gues, en o finigen galet,  
Rag oll omp breudeur dre natur, crouet ebars er bed-man,  
Lod n'ho d'eus nemet pligeadur a lod all nemet tourmant.

Hennomp a vizer mar gellomp, an ini a vo en poan,  
V roomp d'he soulageamant, dreist oll en creis ar gouan,  
O occupit an devegerien, vit beva o famillou,  
O arit o nessa eveldoc'h ag e c'hefet d'an envou.

FIN

*Propriété réservée de l'Auteur.*

---

Imprimiri A. Chevalier, Montroulez